

\*\*\*\*\*

\*\*\*\*\*

# CANTIC SPIRITUEL,

VAR AR SEIZ PECHET MARVEL.

**E**N hano Jesus, Mab Mari,  
Em eus c'hoant da antrepreni  
Ha da rei un avertissamant  
Da beb-unan d'en-em amant.

Mes evel me n'en don netra  
Nemet ur prev d'ouar er bed-ma  
Ar boan din sonjal e zeo ber  
Hep an assistanç eus va Zalver.

Hoguen penaus e creten-me  
Sellet birvigen ouz an ên?  
Rac ne don nemet importanç,  
Leun a bec'het hac ignoranç.

Pa bec'has Adam da guenta  
O credi e tebri e voa,  
O tanva ar vezen eus a vue  
A voa difennet gant Doue

Goude-ze emañ e oll ligne  
Dre ur goalen a gasti Doue,  
Sujet da bep seurt tourmanchou.



Hac alias ! siouas d'ar flammou.

Daou hent a so goude mervel,  
Unan, siouas ! so eternel,  
Un all a gavan rapportet,  
A bado bete fin ar bed.

Ne laçan qet a differanç  
Entre an daou hent en assuranç,  
Nemet unan so er purgatoar,  
Eno eus esperanç d'ar gloar.

Ema eno an *Æl-Gardien*  
O consoli ar *Cristenien*,  
Me lar ar re so bet fidel  
E graç Doue bete mervel.

Mar comzàn eus ar Eternel,  
O va Doue ! pebes gentel  
A dleñemp oll da studia  
Qeit ha ma zomp var ar bed-mâ.

Goude ar mard incontinant  
E clevo pep-unan e jujamant  
Ar jujamant particuller  
A rañ Jesus-Christ, va Salver.

Neuse pep-hini a vezo barnet  
Evel m'en devo meritet,  
Ar re just a vezo d'ar joayou,  
Hac ar re injust d'ar poañou.

Horror ha spont so em c'halon,  
Och ober an description  
Var ar sujet qer deplorable.

Evel an ifern miserabl.

Pa deuan da gomz eus an ifern,

E teu da strael va oll esqern,

O lavaret ur gomz qer barbar,

Me gred e tigor an douar

Pa bunissa va arogarc

A henep Doue en e bresarc.

Evit ne ancounac'han qet

Ar pezh am eus antreprenet,

Hac an ifern e comzan breman,

Bet attantif guitibudan.

Ebars en ifern e punisser

Rigourusamant ar pec'her,

A so bet qen cris a galon

Da oflanci Jesus Roue an Tron.

Tudou yaouanq, tud debochet,

Prestet ho tiou scouarn da glevet

Penaus e punisser an dud yaouanq

Evit o buez infam, ha mechant.

Boud a ra seiz pec'het capital

A so mestri d'an oll re-all,

Pere a gundu d'ar flammou

Bemdez nombr bras a eneou.

D'an dud orgouillous me a lavar

E reont o barados var an douar,

Rac dre an orgouill ar gristenien

A ya d'an ifern qen ha qellien.

Usurier avaricius,

An tan en ifern so grius,  
 Evit pemp scoet qemerer unan,  
 Camarad e vezi da Satan.

Mar ec'h eus souillet da ene  
 Dre ar pec'het lubricite,  
 E zi e creis punç an ifern  
 Da veza losquet qic hac esqern.

Den anvius, clêo ouzin,  
 Comz ouzit breman a fell din,  
 Gant an desir ec'h eus bemde,  
 En ifern e ma da vele.

Pa veles un dra da nessa,  
 Ec'h eus ambition outa,  
 En defaut ne elles e attrap,  
 Ne ma get da galon erfat.

Ma na guittaes ar pec'het-se  
 Ha roi da galon da Zoue,  
 Me bromet dit hac en assur  
 E zi d'an ifern a dra sur.

Na te mezier qen obstinet,  
 Pa yes da gôves da bec'het,  
 Ha te c'heus sonch d'en em reproch  
 Ar pec'het a res en deboch?

Brassoc'h pec'herien so er bed  
 Eo ar mervierien obstinet,  
 Pa vezont gant o debochou,  
 E reont nombr bras a bec'hejou.

Ur banquet caer a breparer

Dit en ifern gant Lucifer,  
 Guin ha cher vat, q'emër courach,  
 En ifern emä da avantach.

Aoun em eus ebars em c'halon  
 Na vezo sur da zaonation,  
 Ma na gueres quittât ar guin,  
 En ifern e vezo da fin.

Goad an tousegnet ha sourdet,  
 Entraillou an oll serpentet  
 A vezo roet d'ar mezvier da eva,  
 Evit e zebochou er bed-mâ.

Tud colerus-ta, respontet,  
 Penaus e coler surmontet,  
 An diaoulou criz arrajet  
 A so gant counnar animet.

Sao, diegus, deus da vele  
 Da drugarecat un Doue  
 P'eni a ro dit, pa c'heus affer,  
 Qement a so dit neoesser.

Petra servich dit bout diegus  
 Na serviches hor Salver Jesus,  
 Ma na guittaes an diegui,  
 E zi d'an ifern da lesqi.

En ifern emä'n stracl an tan,  
 A zo spontus da bep-unan,  
 Da zont da losqi ebars en tan,  
 Ma vezont qirjec ur memes poan.

N'en deus teod var an douar.

A ouffe lavaret pe sort counnar  
 A renq da souffri peb ene  
 So bet infidel da Zoue.

Eno, siouas, ema ar gounnar  
 Entre tad ha mam, breur ha c'hoar,  
 Hac y arrajet evel chas,  
 Chadennet mat gant Satanas.

An tad a lavaro d'e vab :  
 Mil bennos dide, mab ingrat ;  
 Te so caos d'am oll poaniou,  
 O clasq rapina did madou.

O tad infam ha milliguet !  
 Evit recompanç assuret,  
 E vo brusunet va oll esqera  
 Gant an diaoulou en ifern.

O clasq va laqat ebars er gloar,  
 Ez oun lonqet gant an douar,  
 Da losqi en un eternite  
 Qeit ha ma vezo un Doue.

Neuse e laro ar verc'h d'he mam :  
 Mil mallos dit, c'avarn issam ;  
 Ouz va lezel em liberte,  
 M'em eus quittaet un Doue.

Ma carjes bet va c'horrija,  
 Hac ober din da oboissa,  
 Ober din beza sourcius  
 Da enori her Zalver Jesus.

Elec'h mont d'an oferen bret,

A yoa gant Doue commandet,  
 Me chomme da evessa va dilfat,  
 Evit mont neuse d'an ebat.

Ruban, carcanon ha danteles  
 A ranquen da gaout alies  
 Evit ma aljen me sonje dir,  
 Beza guelet gant pep hin.

Evit ma oll perlesennon,  
 Cetu me couezet er poaniou;  
 Me ro mil malediction  
 E qement so, din occasion.

Eno e ma ar pinvidic,  
 Fals prophetet ha tud' lubric,  
 An eil o staga egaile,  
 O c'houlen venjanç ouz Doue.

Ar fals pinvidic a garre  
 Dont var an douar adarre,  
 Evit ma royo aluzon  
 D'ar paour Lazar a vir galon.

Tud yaouane, tud impudic,  
 A heuill plijadures ar c'hic,  
 Penaus e credet apparissa  
 Dirac an Itron Varia?

Hounnes a so a dra certen  
 Advocades ar bec'herien,  
 Ispicial ar merc'het pur,  
 Ar re a so partet ha fur.

Tud a justic, scrivagourien,

Bet charitabl ouz ar beorien ,  
 Na vet qet james rust outo ,  
 Ha Jesus ho recompanso.

Quitta ta , pec'her , da diegui ,  
 Bez d'ilijant , na gortos mui ;  
 Deus timat da ober pinigen ,  
 Qeit ha ma zeus c'hoas moyen.

Tud yaouanq , clêvet ouzin ,  
 Petra benac ma so indign ,  
 Nep a vezo devot d'ar Verc'hes ,  
 E vezo dezàn Alvocades.

Evit conclui ha sinissàn ,  
 Digant Doue e c'houlennàn  
 Ar c'hraç da surmonti bepret  
 Finessaou Satan hac ar bed.

Ar vers-màn so a nevez  
 An nauntecvet de a vis Mae ,  
 Gant ur C'hloarec n'en deus esper  
 Nemet servicha hor Salver.

F I N.



E Montroulez , eus a Imprimeri LEDAN.